



AN TER SEIEN

Goustadik.




Bet zo bet eun - am-




zer, eun am-zer tre - me net, Eun




am-zer tre - me - net, Hag e karen ka-



rout hag e vezen ka - ret, Latira ! Hag



e karen karout - Hag e ve-zen ka-



ret.

Bet 'zo bet eun amzer, eun amzer tremenet,
Eun amzer tremenet,
Hag e karen karout hag e vezen karet,
Latira!

Hag e karen karout hag e vezen karet.

Breman 'z eus eun amzer, eun amzer kon-
[trel d'in,
Ne ran joa ouz hini, hini na ra ouzin.

Bout 'zo bet eun amzer e tougen ter seien :
Unan ru, unan c'hlas, eun all hag a oa gwen

An hini ru 'laken en enor d'ar madou,
An hini glas 'laken en enor d'ar bizou.

An hini glas 'laken en enor d'ar bizou,
An hini gwen 'laken etrezomp-ni hon daou.

Chetu ni dimeet ha chetu ni kontant,
Laket d'imp 'n hon spered d'ober eur va-
[timant.

Groet e ar vatimant ha laket war ar mor ;
E te d'ar broiou pell, pell diouz ochou
[Arvor.

Ne oa ket tremenet, tremenet c'hoaz eur
[ble,
Kollet ar vatimant, kollet ma den ive !

Kollet ar vatimant, kollet ma den ive !
Kenavo, eurusted, kenavo, levane !...

Ma zer seien breman n'o dougin mui james !
Reit am eus int e prof da chapel ar Wer-
[c'hez.

Me 'm oa bet eun amzer, eun amzer tre-
[menet,
Ha ma karen karout hag e vezen karet !...

Recueilli par X. L.

Duramb
musique Duhamel